

Au fol° 329 recto, titre (écriture du Dr Halleguen):

(329 recto)

an uzulier

[Le texte est écrit à l'encre rouge.]

(329 verso)

An uzulier.

Ë medi ar paour en tal ho pors
Ë c'houlén eun tam bara deus ho tors;

Pe eur bastel gig divar ho plad
Pe vassin ar iod da grignad.

— Me zo va chass o c'hemoc'h ar c'had
Pa deuchont d'ar ger ho kaffint mad.

Me ne Kaff Ked din eus Kernez vras,
Pa na pur ar beïen ar iod glas,
ar pri demeure ar mehou bras.

Me ne Kaff Ked din ve Ker an ed (ar boued)
Pa ne da seiz SKoet peb greunen ed.

Pa ne da seiz SKoet peb pikodat
Na kavet lez gant peb sac'hat.

— Roit d'ar paour an alluzen
Me a tremeno eb tam d'am meren.

— Ar pred all te a raffe Korvad
Zebpe diou pe teir SKudellad.

(330 verso)

Pa ie an uzulier d'an illis,
Ë chache ar paour var he c'houris,

hag a c'houlene, Ken truezus,
— eun dinerig en hanon Jesus.

190

— Me ne meus nag arc'hant nag aour
 Netra e bed da rei d'ar baour.

Na klan fatig en eum Karet
 Ober he testamant en n'eus Choantet.

— grid ho testamant pa geret,
 A pa iaffe da pemp Kant SKoët
 Vel ma leverot a vo groet.

— Me meus aze lisseliou moan
 Laket ar gaera d'am lianan
 Vid ma zin bras deus ar bed man.

— Nag aze zo eur c'hos valin
 Seiz vla zo o telc'hel ad lin
 A zo manivik evid ho min.

A zo manivik evid ho min
 Evid mond d'an ivern da zevi.

(331 verso)

— Setu aman fad zo eur verc'h vad
 a testamant an ivern d'he zad ?

Setu an uzulier maro [i]
 D'he anterramant deuet n'eb a garo.

Pa ia an uzulier d'an douar
 E lam an diaoul var lost ar c'har.

nag e lavare dre ma ze
 Eman zo din korf ag ine.

Pa voa laket bars en illis
 hag en laket var ar vaskalon,

eur striak en deus gred he archet
 he ben e mez n' deus digasset,

191

evit lavaret da dud he kaon
 Na no ped chen ked evit-han
 E voa o lestki e kreiz an tan.

(332 verso)

An uzulier a lavare
 En pññ an ivern pa [d]iskene :

— Na va lestki da vond er mez
 Me a rei an alluzen bemdez

— Souez na rez pa voas he c'hez
 Na breman ne c'hi ked er mez.

— Mar karje bed ma merc'h Mari
 Rei an alluzen eb goud diñ
 En devoa sañvetet ene tri

Ene va mam ene va zad

Na va hini-me va eunan
 Breman on e lestki kreiz an tan !

—

[pas de trad. franç.]